



CHANSON

Komposet er bloas mil eis kant tri ha
pevar-ugent

VAR DON : *C'hui potret ar gard mobil, etc.*

Didosteid, me ho suppli, tud koz ha tud yaouanc,
Da zelaou kana eur zon, great er blavez present,
E pehini he komzan, euz ann oll en general ;
Mes ha ganton Taule, er gran ispicial.

Komansomp da guenta, n'ha dre ar vugale
A ia bemdez d'ar skol, ha d'ar gear goude,
Ha pere gant joa, ha red dre ann entchou,
Ato a daolliou mein pe a daolliou boutou.

C'hoarzin 'refet greiz kalon, bemdez m'ar ho guelfac'h
Gant ho mancheier gloan, ho terchi ho bisaj,
Kar tom he vez dezo, c'huizi ha reont ive ;
Ar vein ha zo skanw, mes pounner ar bale.

N'ha pa vezont skouizet, vaise en em ganna,
Ez eont en eur vanden, hag he ranker kana
Hag ivez c'huitellat, pe m'ar keret sutal,
Un'n krok he dorn ennez, heman ea dorn enn all.

Mes lezomp ar vugale da gana kantikou
Hag euillomp ar yaouankis, ebars ar pardonniou :

Eno vefont guelel, deuz ar c'hraon d'ar c'hafe,
Ha pa vezont regalet, danzal 'rankont goude.

Guelit enn den yaouank, gant eur bale civil
O klask eur fumellen ; ar goaz vez difeñl
Kar neket aoualc'h, d'ar plac'h beza koaut,
Ret eo dezi ive, kaont eun dornat arc'hant.

Lakeat en deuz he dok, var l'oztezik he benn,
Eur montr enn he c'hodell, n'he vruchet eur chaden
Hag enn he veg eur biben, pe eur c'horn, m'ar keret,
Enn he jakot eun tamik lerr, a zo eur blaguen hanvet.

Neuze gant he fumellen, he teu da dal ann danç,
N'he galon ar joasted, n'he c'hinou elokañç
Kemer 'ra he faraplui, evit he diskuiza,
Ha pa ve gret eun dro viet, he fed da verenna.

Ar plac'h, gant eun tam ardou, gantan y a zo et
Ha prest enn hostaliri, goude 've goulennet
« Ar c'hafe du, m'ar plij, ha guin-ardant gantan,
« Kar me koulz ag ar plac'h, ann dra ze a garan. »

N'ha pa ve ar c'hafe du hag ar guin ardant ovet
Ha greai kaochoù brao ha deuz ann daol savet,
Neuze vez goulennet gant kals ha gomzou kaër
« Kontant e vec'h, plac'h yaouank, c'hafen ganeoc'h
[d'ar guer, »

Ar plac'h ha respont raktal : « ia zur a greiz kalon
« Ha dissul d'ann assamble, me c'hei ganeoc'h va mignon
« N'hi ha yelo d'ao c'hours, d'a gours Locquenole
« Hag ive da zanzal, ha da'nn danten goude. »

Depeign' rankan ive guiskamant ar plac'h yaouank :
Var he biz he deuz laket eun tamik neud arc'hant

Da behini vez roet ann hano kaer a oualen
Hag ann dra ze hanvan-me, eun spes kos ruillen.

Evit beza, emezi, n'hag er vro estimet
He rank beza ruz ar faç, hag ar bleo rannet ;
Var he fen he laka eun tam jobilinen
Ha ne ve james douguet gant eun ene kristen.

'N dro de gouzouk he laka, sign ar Redemption.
Kalz guelloc'b e ve dezi he lakat ne c'halon,
Kar neuze, martreze, he teuje d'ha gompren
Ar joa, vez ho ren eur vuez a oll kristen.

Var he bruchet he laka, eun tam lien feret ;
Ann dra ze dre ar vro a zo eur gempz hanvet.
Diou woualennat voulouz, var he manch zo laket ;
Martreze var ar plouz enn noz e rank kousket.

Ar mouchoer 'vez laket, beteg anter al lozten,
Deuz houman en em servich, da skuba ar boultren ;
Enn dro d'ann tavanher, ha var ar godellou
He veler lieten 'c'hober papillonou.

Mes drolla tra gavan, hag a ra din c'hoarzin,
Eo guelet var he c'hein, kloz'hou 'c'hober din, din,
Gant aon martreze, n'ha ve dre 'nenchon kollet,
Pe autramant ive, lakat ann dud da zellet.

Komz a rankan breuman euz a re dimezet.
Hag evit mont deuz renk, kommançan dre 'r goarzet :
Kalz a nezo 've guelet, d'ar zul goude 'noffiçou
O tebri ho zizun enn hostalirion.

Ne ket aoualle'h d'ho graguez rei kals a boan speret
Erguer, pa erruont, bazadou d'he ve roet
Ha c'hoaz komz zioul, dere'hel kloz ar guinou,
P'autramant epad ann noz, ne glever met mallochou.

Mes laromp ar wirionez, kalz demuez ar merc'het
A red ann hostaliriou, digarez klask ho goarzet,
Ha pere, eb kaout mez, oa eva gwin ardent
Gant m'a vo n'ho godeillou eun neubeudik ar'e hant.

Eur guzul deoch a rofen, m'ar kerit ma zelaou :
He leac'h koll ho c'harc'hant ebarz en tavarniou
Lakin!-he a goztez, bezit kempen varn an
Evit m'ha er c'hafot, pa vefet koz pe glan.

N'eur echui c'houlennan digant Doue he c'hraçou
'Vit ma teui ann oll dud d'anaout ho defautou
Ha da guemer skouer, var buez ho fatron
Hag ive d'he biqi euz a greiz ho c'halon.

J.-M. HÉLÉOUET.



Propriété de l'éditeur.